

Evet a sort a garfoc'h emezi ma servicher,
Me fenos e renquo em c'hondui d'ar guer :
Allas neuze he teuis da zonjal en memor, em speret,
Ha cetu aman eun den hac a zo goal dapet.

Nonobsant da guement-ze partial a vo ret.
Mez ma na nê quet wit querzet, hi dougouen ne rin quet,
Mes pa voamp deut barzenn awel, hacavancet barzen hent
Pa zispegen dionti he coeze war ann dachen.

Ar paraplui a zo collet' hac hi zavancher zo a scleg,
Hac he houëf ha zo chomet a damo hed ann dreiz,
Cetu clanw bras ar plac'h paour, na guemer na troad, na penn
Ha me zo nec'het bras gant ma mestrez stroullenn.

Ya clanw bras eo ma mestrez, ne quet ewit querzet,
Ret he din hi lezal war ar n'hent, ha hi laquat da gousquat,
Neuse me zeui d'ar guer hac hi lezes enno,
Pa hi devo cousoquet awalc'h, marteze hi difuno.

Guelloc'h we d'ar sort merc'het en plaç ho farapluioù.
Caout kiri geloet pa hefent d'ar foariou,
Ha neuze d'ha vianna, ma ne venquet wit querset.
He vefent tolet he bars, hac ha vefent chareet.

Ho hass he vefet propoc'h car ne vefen ket golet,
Ha quit he vefe ho dillat da vezan habimet.
Ha comotoc'h eo ive d'ar re ve deus o ren,
Car pignat ebars ar har n'euz ket quement a boen.

Ho pedi ha ran merc'het dre ma zon d'oc'h mignon ;
Da vezan moderet pa ewet boesson ;
Car enn eur ewan re, a offancer Doue,
Distruan' a ret ho corf, ha lahan ho ine.

Evidon me d'ho quelen me zo ive bambocher,
Demeus a barez Gourin, hac he chom er *Kerguicher*.
Me a zo eur pzour qez den, gant ann ewac'h dibochet,
Mez ret ew d'hin lezel ma renq er bla-man gan ar merc'het.

Hac eur vicher fall ew ive evit destum madou.
Ret he dint mont er bla-man da varc'hadour coëffou,
Entre ar pez a vo uzet hac ar pez a vo roguet,
Marteze he teui ha benn, da honnit ma zam boet.

FIN.

MARI BEG A ROC A FRI PARTOUT

VAR TON : Son an dançou.

Mar od'h eus c'hoant, va mignonet, d'a anveout eur vreg rog,
Me o kunduo oa guerfel, dirag Mari beg a rog,
Bemde var dro eun heur anter e cluc'h var treujou e dor,
Kerkent teodou pig ar c'hartier gant eur skaoun pe eur gador.
A zired oll en e c'hever, an audianç so digor.

Var barlen Mari o voler pes foultr'en assied,
Var bui e cont pep kommer kement e deus iventet ;
Klêvet a rêr pep den lipous a ya bemde d'ar c'hafé,
Pet plac'h a deus tri amourous, ha pet a zo stad eune :
Pet ozac'h a zo mewier, ha pet a bill o grague.

Mari beg arog a gommard var ar c'honseil divragou,
Eb kaout an nebeuta damant e tigor franç e guenou,
Pa ne deus var e bizach na moustachou na baour.
E red déi kaout an avantaj da zikrial tud ar vro.
Guëvier, sotoni, kos langach, fluid a bep kalite zo.

Mari beg arog eo titret vel an huella noblanç.
Dommaj è n'en d'è ket pried d'eun den pinvidik a Franc ;
I è princes an diegi, comtess a liboudennou,
I è dukes al loustoni, marquises ar strakellou,
Gouarneres ar jolori, baronez ar pillow.

Kerken a ma ve imbandet daou den yaouank da zimi,
Eve, d'al lun vintin, galvet e c'honseil bras gant Mari
Ped Konseiller en gueleden a boangn gant e vouton bér
Evit klask ar guellan moyen da deari pront an affer ;
Ar plac'h a gar ar jigoden, pe ar goas a ve mèvier.

Ar re voassa da zikrial an tud a ya en fortun
A zo, evi an ordinal, merc'bed chommet eb nikun,
Merc'bed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas,
Hac a gommanç brêma facha, dre ma ne deu den do choas.
Kouskoude an ini gossa n'est ket tri-uguent vloa c'hoas.
Kerkent ha ma vel eun eured o tout var zu an Ilis
Mari beg arog a zired en manchou lous en invis,
Evel eur vioc'h ha vreskin e c'haloup abiou ar ru,
Holà ! Catel, Jeannet, Perrin, Soas, Mac'harid, deut dious-tu,
Cetu aman eured Martin, deut dremen ar rêvu.

Va c'hommer sellit eus hounes, dislivet e davancher
E c'horner en zo eb ampes, hag e gueleden re vîr ;
Ho ! sellit-ta eus den-man, peguen striz è e vragou,
E dog so brassoc'h evitan ; ha kals re hir e voutou,
Eur chimizeten so gantan var eur rochet en pillow ;

Pa ve eur vreg kes guilloudet, divar e buguel kenta,
E c'houlen Mari estonet : petra nos mis so dija ?
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pôl.
Ha pask n'est kes c'hoas erruet, allon ! grêd o deus an tol
Eb n'o deveus va c'hemennet, an dra ze gavan drol.

Pa gleo klok'h Ilis a barrous o c'hervel d'eur vadiant
Mari gant eun troad eb botes, a erru arog ar chant ;
Mæs, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur voues ken
Da zikour kan Te Deum evit an neve ganet, [raoulet
Gant e c'hommerez et chom e kichen dor ar vèret.